

STAGADENN DA  
**AR FALZ**

19<sup>ved</sup> bloavez - Niv. 3 - 1957 - Miz Gouere

---

**EUN DIBAB  
PENNADOU BREZONEG**



Skeudennou gand P. Péron

savet gand bugale ha tud yaouank  
or skoliou  
evid Pevare Kenstrivadeg ar Falz

*Embannet evid ar Skoliou gand  
Oberenn al Leoriou-Skol Brezoneg  
Ar Falz - B. P. 19 - Brest*

# Tôliou-spont

An dineizer

o tiskenn deuz ar wezenn-gignez...

... Mond d'an traoñ dle bout êzoh 'vid pignad. Ar hef n'eo ket ken teo anezañ da genta, 'gav din.

Goustadig 'tiskennan...

'Maon dispieg deuz ar brank izella.

Ar hleuñ n'eo ket ledan-ledan deuz an tu-mañ; ar 'foz zo don. Teoaad ra ar hef, — vo ket pell ne vin ket mui 'vid miroud da riskla. Ma kouezan war ar hleuñ chañchin penn 'barz ar 'foz.

Neh teu din. Klask a ran pignad endro da gaoud gaol ar wezenn. Padal 'meus ket nerz a-walh 'barz ma divesker, n'on ket kapat da starda ar hef kreñv 'walh. Petra zigouezo bremañ ganin 'ta?

Biskoaz n'on ket ken gwaz luziet. Ha me ha hopal, ha yudal:

— Deut da zikour!

Ma hasketenn zo kouezet a-dre ma dent, viou hag all. O, mamm baour, mamm baour! N'eus den war wel ha ne deuan ket a-benn da bignad uheloh. Ma kouezan 'maon echu.

Ha da hopal a-bouez ma 'fenn!



Mez, gweloud ran mamm o tiredeg. Hopal ra da laroud din gortoz.

Ma izili zo hantez-vorzet; ét vint dinerz 'barz ma vo digouezet.

— Deut founnuz 'ta, n'on ket mui 'vid padoud!

An aon da goueza 'barz ar 'foz don, da dorri ma goug, a ra din briata ar hef ken stard ma hellan.

'Mañ ma mamm o tigouezoud, o tond war ar hleuñ. Astenn ra he daouarn din da boueza warno. Hag e sikour ahanon da zond d'an traoñ.

Tomm-ruz eo deut din. Dêrou ha dour-c'hwez a red war ma dioujod. Klevoud ran ma halon o taoulammad. Mamm zo ét berr he anal gand he redadenn. Ha me, war-lerh ma haouad neh, 'm-eus mez bremañ. Dao oa din hopal kaoud sikour 'vid diskenn diwar ar wezenn. Ouspenn, eur gentel yahig glevan bremañ gand mamm. Ha maasketenn zo 'barz ar 'foz, mastaret-toud gand ar viou brevet.

J. JEANNES, Lise KEMPER.

Ar bod-lann ouz sklerijenn al loar..

'Pad ar vakañsou braz, me vez o labourad 'vid dorna ha tenna avalou-douar.

Eun tól, e oa echu an devez diwezed; tro eiz eur bennag oam ét da zibri koan...

'Benn hanter-noz oan o tond d'ar gêr 'vid mond da gousket, hag em-oa daou gilometr bennag d'ober.

Digouezet oan en eur park. Ha me gweled eun dra hag a vouje war ar hleuñ, er penn all d'ar park.

Petra 'ni oa 'ta? Eul lutin marteze?

Just oa bet kôz euz al lutinou ganeom.

Ma bleo a zave 'bik war ma 'fenn.

Petra rin? Mond 'benn dezañ, pe ober tro?

'Benn ar fin ha me tapa ma houtell 'barz ma dorn ha mond eun dirazon atao. Dre ma tosteen, me zante dour-c'hwez o redeg 'traoñ gand ma hein.

'Benn ar fin, oan tost d'ar hleuñ, ha petra welan?

... Eur bod lann hag a vouje gand an avel dindan al loar!

J. RANNOU, SANT-IVI.

Neh-ruz rag e gi..

Eun tól, 'n eur zond deuz ar skol, tro seiz eur hanter, n'oa ket gwall skler ken. Ne oan ket re fier. Kenta oa, me klevod eur pez trouz en tu all d'ar harz. Ha me chom a-zav.

N'ouien ket petra ober: mond kuit 'n eur redeg, petramant chom war ar plas.

Mez kenta oa, me wel eun dra du-rouz o tond euz ar park. 'Ouien ket petra 'ni oa. Ha me komañs redeg. Ha ne zellen ket war ma lerh!

A-jors da redeg oan deut da skuiza.

Ha me gweled eur penn-baz dirazon. Dioustu 'm-eus paket anezañ, ha prest oan da zihasta war al loen a oa o tond war ma lerh.

Al loen teue atao trezeg ennon.

Me 'm-oa neh-ruz!

Padal, pa 'm-oa sellet mad, ma hi 'ni oa o heuilh ahanon.

Biken mije soñjet kemend-all!

'Michañs ne hoarvezo ket ganij. kaoud neh e-giz-se ken.

R. BIRIEN, ARGOL.

Aon rag an naer:

... Futella rê an naer 'n eur denna he zeod e-méz.

— Gortozit! 'Maik-tuchant vo gwelet piou ar mestr amañ!

Krena rê gand aon koulskoude. Ha me mond da zastum eur vaz da zistruja al loen fall... Pa oan deut endro, an naer a bare he daoulagad dir warnon. Me lammas dezi. An tóliou baz evel grizilh a goueze war al loen vil. Yudal a rênd ive da sponta anezi ha 'vid digas kouraj din.

Deut oan 'benn deuz-outi. Sklapet 'm-oe nezi du-mañ du-hont ken ne fiñve mui anezi.

— Me zesko deoh, loen an diaoul, dond da sponta an dud..

A. JEGOU, Skol SANT-YANN-TROLIMON.

Aon rag eur had..

... En eur baseal eun toull-karr da vond en eur park, e kle- van eun trouz, ha kerkent ez eas daou aneval e-biou va zreid: ne oa nemed eul lapin hag eur hi war e lerh... Spontet oan bet beteg ma ne rênd nemed krena!... Va halonig daour a lam- me, — ha va izili a oa skornet gand ar spont.

Drouklivet evel eur horv maro, e tigouezan en ti.

— Petra 'ta zo en em gavet ganez? a houlennas diganen va mamm.

Kontet 'm-oa dezi va zro.

— Te zo sod awalh: aon deuz eul lapin hag eur hi!

M.-M. COMBOT, Skol ar merhed, GARLAN.

Aon rag eun den-plouz..

... Erruet e oan en hanter penn eun dachenn, ha me ha sevel ma 'fenn: petra a welan? eun den divalo ha ne vouje ket, e-kreiz eur parkad pez bihan. Ken spontet e oan, ma ne

oan ket gouest da vale; ma halon a lamme kreñv. Paseet e oa eun nebeut muniziu abarz 'm-oa gallet mond kuit. Komañsed e oan da redeg ha da redeg, beteg ar gêr, en eur grial.

Spontet ivez ma mamm ganin.

— Petra a zo c'hoarvezet, ma merh, petra: lavarit din buan!

— Me am-eus bet aon a-rôg eun den divalo e-kreiz park Izidor an Trest.

— O! n'eo ket posubl e pefe bet aon a-rôg an den-plouz-se, emezi. Hemañ a zo bet lakêt da sponta al laboused, eur bra-gou truilh peñseliet gantañ, e zivreh digor-braz, eur jupenn rouz war e gein hag eun tok rond giz ar vourhizien war e benn...

Kement a aon am-oa bet m'am-oa kollet ma fez hanter-kant lur!...

Y. LE LANN, Skol ar merhed, AR FAOU.

#### Spontet gand ar haz du...

Eur wech, giz on boazet, voen êt da ober tan dindan ar poalad avalou-douar evid ar moh. Ar poal oa plaset en eun toull teñval ha ne welen ket kalz a dra nemed an tan. Me a oa o soñjal e-barz an neizou 'm-oa kavet an devez-se; eun neiz pig, eun neiz moualh... N'am-oe ket amzer da zoñjal muioh: eun dra bennag a baseas dirag ma daoulagad giz eur barrad avel. An tamm tra-ze a bignas war ar poal ha goude-ze e-barz ar jiminal en eur ober eun trouz spontuz. Ne vije ket bet netra, ma ne vije ket bet kouezet n'ouzon ket petra war ar jidouarn ha goude war ma 'fenn.

— O, va Doue! Kenavo ma neizou! Me zoñje ma eur diwe-za a oa digouezet, hag an diaoul o tond da gemer ahanon.

Me a deuas buan 'mêz o klask kompren petra a oa an tamm trouz-se. Spontet fin e oan. Abarz ar fin ne welas o tond 'mêz ar jiminal ar haz du o sklejad eun anduilhen war e lerr!...

— A! a! a! Bremañ e komprenan! Ar haz du a oa o redeg warlerh eul logodenn. Houmañ a oa pignet 'barz ar jiminal... Ar haz du n'oa ket kavet netra, hag a lammas d'an traoñ o tigas gantañ eun anduilhenn. A! a! a! talvoud a ra ar boan gweled ar haz du gand e anduilhenn bremañ!...

J.-Cl. GADONNA, Skol PLOVAN.

#### Eun huñvre spontuz...

An nozvez-se, e-kreiz va housk, e oan strafuilhet-net; ne welen nemed naered endro din, em gwele ha war ar zolier, naered rouz hag hir, sounn o 'fenn ganto, o tond din. Me en em lakeas da grial a-bouez va 'fenn: « Mamm! n'eus nemed naered rouz hag hir, flemmet on ganto. Mamm! deus buan da gas anezo kuit! » Lefva a rên doureg. Ranket he doa va mamm kas ahanon ganti en he gwele.

Y. QUEMENER (An Trehou), Lise LANDERNE.

#### War-var peñsea...

Eun dervez, da houde lein, me ha va zad a oa 'vid mond da besketa kichen ar Vein Velen. En dervez-se e oa bet eun tammig brumachenn. Pa edom emgavet hanter hent diouz ar Vein Velen e santom ar hanod o dounaad 'barz ar mor. Va zad a lavare:

— Petra zo emgavet?...

Pa oe sellet ouz kostez ar hanod, va zad a bakas eur plan-kenn diouz an araog. Med pa edo êt da glask poeñchennou, ne oa hini 'bed 'n oll. Ar hanod a ye dounnoh atao 'barz ar mor. Ni a oa emgavet 'tal an aot. Setu e plantom 'benn d'an douar. Neuze edo beuzet ar moter... Me ha va zad on-oa bet aon en dervez-se!

J.-Y. JEZEQUEL, Skol TREZIEN.

#### Harzet gand lakepoted, en noz...

Sebezet on chomet o weled daou zen o tond a-benn din. Spontet on bet war an tól. Deut on daou pe dri faz war va hiz, lakêt va dorn war va stomok. Chomet on bet aze heb galloud kôzeal...

Lavaret zo bet din sevel va daouarn en neh, ha goulennet diganin:

— Piou out ha peseurt emañ o vond d'ober dre amañ?

Me, atao spontet, n'edon ket gouest da respont dezafi. Goulennet e-neus eur wech all diganin. Kroget e-neus ennon; prest e oa an den da lamma warnon, p'am-eus gwelet va hi Dik en va hichen. Diouz peleh e oa deut? Biken araog ne zeue war va lerr. Iset am-eus anezafi warno. Dioustu e-neus lammet outo, hag ar re-mañ a haloupe en e ziaraog. N'on ket chomet da weled peleh ez ênt...

F. COLIN, Skol ar bôtred, PORSPODER.

#### An taro kounnaret...

... En eun taol oam bet spontet: eur vlejadenn spontuz a oa deuet euz ar penn all d'ar foenneg hag eun aneval a oa troet etrezeg ennon, en eur heja e benn kerniel hir. Ni a anavez re ar zaout evid kemer aon rag eur vlejadenn, hag e oam en em lakêt da zastum mouar du... Mez a-greiz-toud, evid an eil gwech, e klevom adarre ar vlejadenn spontuz, ha trouz treid pounner o toumpal: e oa an aneval hor boa gwelet daboro o redeg etrezeg ennon.

Neuze on-oa komprenet:

— Eun taro pennfollet! a oam komañset da grial oll asamblez.

— Buan, buan! a lavaren, beh warnon.

Sacha a rên war va genitervezed da zond da va heul. Setu ni en eul lamm er-mêz euz ar foenneg.



... e oa an aneval... o redeg etrezeg ennom

Poent e oa sach a on treid ganeom: an taro a oa kazimant war on seuliou, hag an aneval, mantret o weled an toull re enk dezañ, a oa chomet a-zav...

Ken spontet e oam bet, ma oam gwenn evel eun tamm paper-lizer; or halon a skoe buan en or hreiz. Krena a rêm, hag a-veh ma helle on divesker delher en o zav. Tomm oa bet deom!...

Anna BARS, Skol ar merhed, KASTELL-PAOL.

**O tehoud dirag al lutuned..**

... Dre forz redeg, e teu ma halon da vankoud din; red mad eo din chom a-zav. An trouz a heuilh ahanon bepred hag o dosta buan. Ha me o vond da lañsa adarre, med si-waz ma botez a stok deuz eur mên hag e kouezan a-led ma horv 'mesk an dellou seh. Heb fiñval ha sioul evel eun den maro, e laran ouzin ma-unan:

— Marteze ne welo ket ahanon!

Med al « lutun » a zo aze: eur hlizenn domm a ruilh war ma zal. Ne gredan ket sevel, na dizalani.

Eun dra bennag a gomañs lipad ma bizaj. Skei a ran eun tôl evid kas kuit al lutun. Evid gwir, tehoud a ra, - med en eur harzal!

— Sell 'ta, emon-me, eur hi!

Neuze eh anavezan ma hi, Diane. Gervel a ran anezañ hag e teu em hichen.

— Te zo aze, Diane? Deus amañ. Eom d'ar gêr, heb ket a aon dirag al lutuned!

R. CUDENNEC,

Skol Micheriu Ar Bougen (C.A.B.), BREST.

**Va-unan en ti..**

... A-greiz-oll e klevis an nor o vistoullad hag e houlen-nis piou a oa aze. Respont ebed! Ha me da lared d'an den n'am miije ket digoret an nor ma n'en niije ket laret din e ano. Hag an den da lared din:

— Digorit an nor bepred, hag e lirin ma ano deoh. Me a zo deut da weled ho tad hag ho mamm.

N'am-oa ket kredet an den-ze, ha ne zigoris ket an nor. Hag an den dond d'ar prenestr ha bountañ warni.

— Pa n'hellan ket digeri nag an nor nag ar prenestr, me a zo o vond da gousked er hraou!...

Pa zeuas ma zad ha ma mamm d'ar gêr, e lavaris deze ar pezh am-oa klevet hag e soñje din e oa et an den d'ar hraou. Aze e weljont an den kousket e-touez ar givri. Mezo e oa an den-ze, hag e oa et da ziskuz e-barz ar hraou.

J. KONAN, Skol ar merhed, GRONVEL.

**Daoulagad kaz ar voereb Mai..**

... Teñval du-sah e oa...

Targaz griz ar voereb Mai a oa war lein ar hleuñ. Lugerni a rê e zaoulagad giz diou houlaouenn.

Paket em-oa eur spontadenn, ken ne ouien ket ken peleh en em foura.

Y. LE MENN, Skol DINEOL.

**An den braz 'barz ar park..**

An devez-se oan bet o c'hoari gand ma henderv. War-dro nao eur oa pa oan tond d'ar gêr. Hanter hent, me glevas eun trouz dizanav. Me zelle war ma lerb; ne welen netra. Me zellas neuze a gostez, ha me gweled 'barz eur park evel eun den braz.

Me dapas ma diou har 'barz ma goug, ha galoupad d'ar gêr par ma hallen. Arru 'barz an ti, me gontas petra a oa digouezet ganin.

Pa on et 'barz ma gwele, n'on ket bet evid kousked mad; ne rên ken 'med huñveal traou spontuz.

R. LE SULLIEC, Skol ar merhed, LANGONNED.

**Koachet er banal..**

Ha ni gweled eun den o tond 'trezeg ennom, fall gwisket, eur vaz 'n e zorn. Ni a grene, gand an aouenn (aon).

— Penôz ober? 'm-oa goulennet digant Gisèle. Ha ma vijem ét da goach e-barz eur park?

Ha ni o lampa war ar hleuñ, war or prim, hag o kuzad er banal e-barz ar park.

Ha pa oem savet, e men (on-oa) sellet dreist d'ar hleuñ da weled...

Ma fe, peogwir oa tremenet, ni oa kontant.

Y. ROLLAND, Skol ar Merhed, SANT-KLEVE.

**An tól kurun...**

*(En eun tól), me a glevas eun trouz ken kreñv ken na grenas a ran hag aon 'm-eus. Eun naer zo o sutal war ar peuri ahanon.*

*Kaer em-oa bet selled en-dro din, ne welen netra. Mond a rên da zerri ar prenestr. KerKent eur sklerijenn hag eun tól kurun spontuz!*

*Me a respont deoh ar prenestr a jomas digor, ha me da ruilhad d'an traoñ, o c'hwezi 'giz kreiz an aon...*

Ch. MADEC, Skol ar Bôtred, LENNON.

**An naer o sutal war ar peuri.**

... En eun taol, me glev eun trouz e-kichen va zreid. Krena a ran hag aon 'm-eus. Eun naer zo o sutal war ar peuri e kostez ar 'foz.

Me a gemer eur mên hag a strink anezañ war an naer. Ar mên a deu da skei e benn. Al loen zo lazet war an taol...

J.-Cl. CADAREC, Skol ar Bôtred, PLOUIDER.

**Daou bik skeduz en noz...**

... Grêt va hefridi, em eus kemeret an hent da zond endro. (Selled a rên) war va lerh. Petra em eus gwelet? Daou bik goulou. War an taol e oa bet kreñvoh 'vidon, hag on ét 'n eur redeg 'trezeg ar gêr.

Pa oan deut 'barz an ti, mamm (ha) merzoud va liou. Hi deus goulennet ganin petra oa arruet ganin.

'N eur vesteodi, 'm-eus lavaret 'vedo daou bik skeduz o heulia ahanon penn-da-benn an hent. Toud an dud zo komafset da hoarzin ha da ober goap deuz-ouzon. An daou bik welen ken, a oa daoulagad va hi hag a oa deut sables ganin-me.

J. LE NARD, Skol ar bôtred, SIZUN.

# Diwar-benn · Meurlarjez

**Gwechall e bro Ploneve-ar-Faou:**

D'ar mare-ze e oa kalz tud paour er vro o klask o bara. Da zevez Meurlarjez en em vode eur rummad anezo evid ober tro ar barrez, ganto peb a benn-baz, hag a yênt euz an eil ti d'egile o kestal kig sall pe kig moh. Pa zigouezent dirag eun ti e lavarent:

*Fañch ar Hamm a zo er penn*

*Yann an Treut ar Habiten,*

*Loeiz ar Born ar mevel 'braz,*

*Ha kalz reou all emaint hoaz.*

Neuze e teue mestrez an ti da lavaroud dezo dond e-barz, hag e roe-hi dezo beb a vanne sistr. Hag ez è d'ar baillh da gerhad eun tamm kig moh sall a veze roet dezo ha lakêt en eur zah e veze ganto war o hein. Unan anezo a stage eun tamm kig sall ouz penn eur vaz hag e veze gantañ war e skoaz.

Pa ne veze ket roet netra dezo, pe pa ne veze den er gêr, e lavarent a-bouez-penn:

*Dalhit ganeoh ho kig-sall,*

*Rag ni on-o gand ar re-all.*

Pa veze echu an dro, e veze rannet ar hig sall etrezo, ha ne veze ket dao dezo debri bara seh e-pad pell, rag kalz a gig o devoa dastumet.

M. LE JEUNE, Lise KEMPER.

**E bro Lanhouarne :**

Diouz ar mintin, da veurz al lard ez è paotred an tiegeziou da balad eun tammig douar patatez e ti ar vicherourien: ar hloher, ar halvez, ar marichal, ar hemener hag all; peb hini avad a deve d'ar gêr da zebri ar pred braz. Da houde e veze aradeg, ar pez a antver bremañ « concours ». Ar baotred vad a yê en eur park leton da arad, hag e veze gwelet piou a rê ar gwella labour.

Da houde e veze hoaz toret podou koz a veze staget etre daou di er bourk. Er podou-ze e veze lakêt, en unan dour, en unan all butun, en eun all lês, en eun all mounreiz pe traou all. An den a veze mouchet ha pa en em gave da derri pod an dour pe al lês, ne veze ket brao da weled.

Ar « cheuiou » a bade betek an noz: redeg ar gwalenn ha sacha war al liamm.

L. OLLIVER, Skol LANHOUARNE.

**E bro Ploueskad :**

Da veurz al lard, ar plah pe ar mevel, e veze roet dezo eur pastez pe eun tamm freskad da gas d'o zud...

Da houde lein, ar bôtred yaouank a en em vode evid mond *da redeg ar gwalenn*, bragezeier gwenn ganto. Eur c'hoari brao e oa an tennadeg d'ar gwalenn. Eur walenn a veze lakêt en istribilh. Ar « gavalierien » a en em vode daou pe dri hant metr pelloh, eur wialenn ganto en o dorn hag ez ènt neuze an eil goude egile d'an daou lamm ruz en eur biza d'ar gwalenn. An hini a lakê e wialenn e-barz ar walenn da genta, hennez a veze ar maout. Mez n'oa ket gwall èz da ober, rag an dud a oa o sellad a rê aon d'ar hezeg hag ar paour kêz « kavalier » a yê aliez a-gostez. Neuze e veze eur pezh c'hoarz. A-barz ar fin evelato, unan bennag en deveze chañs da lakaad er walenn, hag hennez en deveze ar priz.

Bez e veze ivez *redadeg ar hihog*, hemañ o veza lezet da redeg en eur park leton. An dud a rede war e lerh. Pa gave d'ar hihog e veze beh warnañ, e nije a-zioh o 'fenn, setu ma o deveze poan o paka anezañ. A-barz ar fin evelato, e teue da skuiza hag e ranke en em rei da unan pe unan ar paour kêz kihog.

Deut ar pardaez, an dud oll, merhed ha pôtrez kêr a bourmene eur bolom kolo ganto dre ar ruiou, ha goude-ze ez ènt war bord eur rivier da gana al libera hag o lavared kenavo ar bloaz a zeu.

Dastumet gand P. ROUE, Skol PLOUESKAD.

**E bro Louargad :**

Ar meurz da noz, Sant Meurlarjez a veze devet war blasenn ar bourk. Oll an dud yaouank a gane hag a dañse endro dezañ. Kaset e veze Meurlarjez d'ar stank evid beza beuzet.

E-pad deveziou Meurlarjez e veze kalz c'hoariadennoù. Dihougañ ar waz: ar c'hoarierien a dremene 'barz eur harr, din-dan ar waz staget ouz eur gordenn, eur vaz en o daouarn, hag e roent eur flipad dezi war he houzoug. An hini a dihouge anezi da genta a oa gounez.

Ar bôtred kreñv a yê da zach war ar vaz pe war an tortis. Kalz a c'hoariadennoù all evel « charren an touseg » pe « difrapadeg al lez » a lakê an dud da hoarzin.

'Benn an noz, aliez e save kann. Neuze e echue ar gouel gand eun tammig gouren, hag unan bennag a yê en eur jil-gamma d'ar gêr.

Ankounac'hêt am-oa lavared deoh penaoz ar plah yaouank a zimeze e-kerz Meurlarjez a veze grêt « Gwrah al Lard » diouti.

E. RAOULT, Lise GWENGAMP.

**E bro Purid :**

Da lun ha da veurz-al-lard e veze redadeg kezeg ha redadeg tud, *sachadeg baz-yod, dañs-ar-butun, dañs-an-dro, dañs-Fanch, dañs-Fisel*, hag all.

Evid echui, da verher, e veze interes Sant-al-Lard. Lakêt e veze 'barz eur harr. Er brehiou e veze daou bôttr goloet evid drevezañ eur marh. A-dreñv e veze tud gwisket e du, oh ober van da ouelañ. Oll e rênt ardou. Grêt e veze tro kêr, hag evid echui, e veze interes Sant-al-Lard 'barz eur stank.

A. AR BOUEDEG, Lise GWENGAMP.

**An Ened e bro ar Vigoudenned:**

« An Ened teir gwech ar bloaz,  
Ha gouel-Mikêl beb seiz vloaz », a lavared.

Pa deve an Ened, e veze cheñchet ar meuzioù: *soubenn kig dous da goan d'an daou yaou araog meurz an Ened, hag a veze galvet: « Yaou ar wreg vad » ha « Yaou ar marh mad ».*

*D'ar gwener e veze gwelet ar merhed o vont d'ar vourh d'ar 'jorn gand eur zah gwenn leun a doaz war o hein. Chom a rênt da zelled ma save an toaz pe ma ne oa ket devet... An dud pinvidig a rê gwastell « komer ». An dud paour n'o-doa ken emed bara dous...*

Y. LE RHUN, Lise ar Merhed, KEMPER.

**E bro Nevez:**

D'al lun e veze lazet eul leue bihan da veza rannet etre an dud tro-war-dro...

Ar hiz a oa dañsal war an dachenn ar gavotenn hag ar jabadao 'n eur gana. D'an abardaez-noz e oa kinniget<sup>9</sup> rubaniou d'an dañserien vad.

Gwisket e veze eur bolom plouz ha kaset d'ober tro ar hêriou, ha goude e veze beuzet.

G. GUILLOU, Skolaj ar Merhed, KEMPERLE.

**E bro Hanveg :**

Gwechall en va bro, Meurlarjez a veze eun dervez disheñvel deuz ar re-all. Traou a veze forz pegement. D'al lun ar 'jorn a veze goret 'vid poaza ar bara, hag ar farchou hag ar pasteou war-lerh ar bara. Da zevez Meurlarjez e veze leun an dôl 'pad an deiz: *kochou mad a gig moh, fars ed-tu, fars gwinniz, fars riz, pasteou...*

War-dro div eur, e komañse ar jeu 'barz eur hreñj. Kane-rien a veze. Toud an dud a zañse, plijadur a oa. (1)

(1) Er Faou, hervez A. LE GOFF, e veze dañset ouz son ar binlou hag ar fletù.

Da Verher goude kreisteiz en em gleve ar re yaouank da vond da veuzi Meurlarjez 'barz ar mor er 'Faou. Toud an dud a leñve d'ober keuz da Veurlarjez.

A. LANCHEC, Skol ar bôtred, HANVEG.

#### Kanaouenn ar gesterien-gig:

Setu amañ ar ganaouenn a veze kanet gand ar re a rê tro ar barrez o kestal evid ar re baour: (1)

Ni a zo a zo deut da doull ho tor,  
Da glask eun tamm kig sall da drempa en dour;  
Aotrou, be' zo 'r paour kêz  
N'eus na bioh, na leue, na lêz,  
Eginane, eginane!

Ho ti a zo braz hag uvel,  
A ve gwelet deuz pell,  
Ha paneve an drez, ar spern braz,  
Vije gwelet deus pelloh hoaz .  
Dre doullig an nor  
Me wel ar pemoh deuz ar skourr,  
Eginane, eginane!

... Eun tamm braz 'm-eus bet ganeoh,  
Kontant on, ha deuz ho merhed kemend-all,  
... Eginane, eginane!

... (A-benn) fin an noz e oa daspugnet tri-ugent lur kig 'n eur gana « Eginane », keld ma oa bet ar re-all o veuzi meurlarjez.

Kaset gand D. COLLOBERT, Skol ar bôtred, SANT-TOZ.

#### Kest ar re baour ha festou-noz, e bro 'n Uhelgoad.

*'Vid ar re baour. Meurlarjez oa eun devez kaer.*

*Gwelet e vezent oh ober tro an tier. Sklapet fors peseurt mod war o hein, e veze eur zah ludu-griz gand tammou lien beb seurt liou. Hag e houlennent an aluzen. Roet e veze dezo eun tamm bara pe eun tamm kig deuz ar pemoh oa bet lazet an devez araog. Int a responte 'samblez: « Bennoz Doue dit, mestr! »*

*Pa zigouezent d'an noz, e choment da gousked 'barz ar hreñj war ar plouz.*

*'Barz lod deuz ar fermou vezent pedet d'ar fest-noz, ha neuze e halle ar re baour kemer o flifadur eun tammig.*

A. ARSON, UHELGOAD.

(1) Bel a reom ar homzou evel m'int bet kaset deom. Red e vije gouzoud hag e talv ar ganaouenn-ze evid Meurlarjez, e gwirionez, hag e pe bro e veze kanet.

#### E bro Plouezoh:

Meurlarjez a veze eur gouel braz evid mevel ha matez, peogwir o deveze liberte (1).

Deiz gwener ar groaz e veze beuzet Sant-al-Lard. Sant-al-Lard a veze grêt gand plouz ha gwisket evel eun den. Tôlet e veze en eur richer ha beuzet.

... Tabouliner ar barrez a deue da gestal hag e veze roet kig dezañ.

J.-P. TROADEC, Lise ar Bôtred, MONTROULEZ.

#### E bro Kastell-Paol:

... War ar blasenn e veze devet Sant-al-Lard. An hini en-doz bet ar muia bouchou bihan (ebeulien) er bloavez, a gase eur harrad lann da ober an tantad.

Da lun ha da veurz oa ar hiz c'ar beorien da gestal bleud hag eun tamm pastez.

... Da verher al ludu e veze kemmet kundu, da lavared eo e-pad ar Horaiz ne veze ket debret kig nemed da zul (2).

M.-F. LE BIHAN, Lise ar Merhed, MONTROULEZ.

(1) « Foar an Neh ha Meurlarjez  
A oa d'an domestiked da vale. »

(2) « Antronoz dervez Molarjez  
Eo merher al Ludu, va zud keiz. »

Korn ar re yaouanka

### Va hi Kim

Pa oa deut Fañch euz bro-Ganada da weled ahanon, ni oa èt da Wimilio da weled ar halvar.

Eur hi bihan oa deut hag e-noa galoupet war ma lerh en eur harzal. Ha me oa tehet kuit, buan, buan, buan! beteg beza skuiz maro.

Pa zegouezas ma zad beteg ennon, e oa ar hi bihan o tond war e lerh.

Dond a reas neuze da lipad ma zaouarn.

Ar hi bihan-ze e-noa c'hoant c'hoari ganin.

An intron a roas anezañ din da gas d'ar gêr evid mad.

Me 'm-eus galvet anezañ « KIM ».

Ha ni ya aliez da hoari er hoadeier.

Herve A. BERR,

Skol Jean-Macé, BREST.

### An ti bihan

Eun devez me am boa graet eun ti bihan gant fibro-simant ha tammou koad. Me am boa c'hoant kousked ebarz ha va mamm he doa lavaret ya.

Bremañ e oa noz. Me am boa degaset kalz a levriou da lenn hag eul letern evit gweled sklaer mat. Me am boa degaset ivez va fijama, palennou, liñseriou hag eun oreiller, met me ne oan ket barrek da gousked peogwir me a gleve « hou hou ». Me ne oan ket bet pell o vond kuit eus an ti bihan ha me oa aet buan da di va data ha neuze me am boa klevet eur c'hi oc'h harzal hag an holl dud o doa lavaret me a oa aonik.

Ronan OMNES,

8 vloaz, PLOUVOUSKAN.

Skolieu Bro-Gwened

### Malarde en Alre

Nag a blijadur e oé bet e veuein boulom Malarde!

Ur morian oé anehoñ, er blé-mañ, unan braz tri metr ihuelded de nebetañ. Boutet e oé bet deù sousén petardeu barh 'r plouz. Deulegad gwenn e oé bet digoret ennoñ é tiskoein dent hirr.

Boud 'oé ur vostad kirri aozet get bokedeu, ohpenn deu-ugent, a gav genein. Biskoah ne oé bet gwelet kemend-arall én Alré.

Hum dolpet doé en dud dirag er gar. Nag a drouz hag a safar a oé geté!

... Pen dé bet kaset er boulom Malardé de greiz er stér, e oé bet streuet esañs, ur bidonnad arnehoñ d'en nebétañ. Ha nezé tarhet o deus er petardeu rah én un dro. Groeit o deus ur safar spontuz.

M'ho pehé gwelet penaoz e ouilé én dud, pa oé bet boutet tan abarh! P'en deus tarhet en tan aveid mad, é oé kleuet ur ouiladenn arall: hani er vugalé e oé. Er ré-sé e ouilé, ne oé ket gober van e hrent, ker kriù e oé tarhet er boulom.

J. RIO.

### Er vered

Arlerh er skol éh oèn é toned d'er gér. Dré er vered éh è en hent. Me welas treu gwenn é toned ar me lerh, ha mé de redeg d'er buannañ, de arrestein ha de gerhet kuit én dro. Me halon e skoé kriù, men deulin e grinè, un hirisadenn neus paset énon.

Me zellé ar drañ dein, me gerhè ag ur park d'un all hag é lammen dreist er gerhèr hag er fozelleu.

Goudé, setu un dén é toned ar me lerh get goulau hag me anauas anehoñ. Eañ oé d'er memeus kêr genein.

Biken ken ne basein dré er vered.

A. HAMON.

### En dra gwenn en noz...

En noz oé yén. Me gerhè ar mem gorrigou; anneauid moé. En devalenn e oen ha pe welezan un dra em raog. En dra-sé oé gwenn ha form un den.

Me grénè, me santè me halon é pillad, — ha prest oen de youh. Oen ket eid chomel azé, nag eid moned e-raog... Mestra, kerhet goustadig em moé groeit. 'Benn oen arriù tal en « dra »... n'óé nitra ken!

R. CAIGNEC.




Eil voulladenn  
(4<sup>ved</sup> miliad)

---

O. L. S. B.  
B. P. 19 - Brest

Tl Moullerez  
« Télégramme » - Brest



**E Porspoder, e-pad Nozvez Laouen Skol-Hañv ar Viniourien :  
Per HELIAS o rei da Fañch COLIN al Leoriou e-neus gounezet e Kenstrivadeg Brezoneg ar Skolioù**